

## Ar vravañ femelenn

Ar vravañ feumelenn yeuank oa e kanton Kelven, oa e kanton Kelven,  
A lak ar boteù-ler bemdeiz an dantel war e fenn, *allon gi ho ge ge*

Iei lak ar botoù-ler bemdeiz an dantel war he fenn  
Ar choej ag ar velinerion `zo bet doc'h he goulenn

Ar choej ag ar velinerion `zo bet doc'h he goulenn  
Nemet hani bet anezhe en do ket hi alkent

Nemet hani `bet anezhe met Jojob Kervazen  
Hag eñ a ya bep sul vintin d'he ambroug d'an oferenn

Hag eñ a ya bep sul vitin d'he ambroug d'an oferenn  
Hag ur bazenn doa da grapiñ iei a gignas he glin

Hag ur bazenn doa da grapin iei a gignas he glin  
Ur jardrinour oe n'e jardrin he c'hlevas e oueliñ

Ur jardrinour oe n'e jardrin he c'hlevas e oueliñ  
Get an druez en doe doc'hti eñ yas d'he c'honsoliñ

Get an druez en doe doc'hti eñ yas d'he c'honsoliñ  
Bet an eizh pe nav miz war-lerch ganet dezhi ur mab

Bet an eizh pe nav miz war-lerch ganet dezhi ur mab  
Ur bleuwigou melen dezhañ ha glas a zaoulagad

Ur bleuviceu melen dezhañ ha glas a zaoulagad  
Heñvel mat doc'h a jardrinour hag el ma oe e dad